


Fañchig Kouer

Miz Gwengolo
2023

Ar gelaouenn bedagogel evit ar re yaouank 7-11 vloaz

**Gouzout hiroc'h
war an holl
vorzhedoù-hoc'h !**



Pajenn 2
**Eus pelec'h
e teu ar
vorzhed-hoc'h ?**

Pajenn 3
**Peseurt kemm
zo etre ur
pemoc'h-gouez
hag ur pemoc'h ?**

Pajenn 4
**Orin ar
vorzhed-hoc'h**

Pajenn 8
**Peseurt
morzhed-hoc'h
dibab e ti ar
charkuter ?**

Piv on-me ?




- ✓ Me zo roz penn-da-benn
- ✓ Gallout a reer lakaat ac'hanon en ur sandwich
- ✓ E-barzh ar moc'h e kaver ac'hanon
- ✓ Gallout a ran bezañ fardet gant tonenn pe hepti



Eus pelec'h e teu ar vorzhed-hoc'h ?


Klask pelec'h emañ ar vorzhed-hoc'h

Diskoulmoù pajenn 8



Ha gouzout a rez ?

E pavioù a-dreñv ar pemoc'h emañ ar vorzhed-hoc'h.



Hag anavezout a rez ar seurtoù morzhed-hoc'h-mañ ?



Morzhed-hoc'h kriz
morzhed-hoc'h damsec'het



Morzhed-hoc'h sec'h
morzhed-hoc'h sec'het



Morzhed-hoc'h poazh
morzhed-hoc'h sallet
ha poazhet goude-se

Morzhed-hoc'h mokedet
morzhed-hoc'h sec'het
ha mokedet goude-se



Ur pennadig Istor-Douaroniezh



A-viskoazh ez eus bet debret morzhed-hoc'h en Europa, digant moc'h-gouez da gentañ ha digant moc'h-doñv da c'houde. Kregiñ da sevel moc'h a sikouras ar C'halianed d'ober o demeurañs evit mat hep kantreal ken. Er memes mare e veze debret morzhed-hoc'h gant impalaerien Roma an Henamzer. Ur meuz a lorc'h e oa da neuze. Er Grennamzer e voe debret da gentañ gant tud a bouez en deizioù-gouel, a-raok dont da vezañ tamm-ha-tamm ur boued diazez evit an holl. Hiziv e vez kavet e meur a veuz e meur a gorn-bro, gant pep a zoare da fardañ anezhi.



Skiantoù-Yec'hed



Degasoù magadurel ar vorzhed-hoc'h

- ✓ Protein (a zo mat evit kreskiñ)
- ✓ Houarn, zink hag eneboksider
- ✓ Vitamin B

Diwall memes tra, ar vorzhed-hoc'h zo holen e-leizh ennañ !

Ha gouzout a rez ?

Hollzebrerien eo ar moc'h, debriñ a reont a bep seurt boued : frouezh, legumaj, geot, pe c'hoazh kig... Ur bern gouennoù moc'h zo, hag a vev e pep lec'h er bed. Kendirvi pell int d'ar moc'h-gouez.



Ha gouzout a rez peseurt kemmoù zo etre ur pemoc'h-gouez hag ur pemoc'h ?

Doñvaet eo bet ar moc'h :

savet e vezont e lec'hioù graet a-ratozh evito gant mab-den. Ar wiz eo o farez, ar perc'hell o re vihan.

Ar moc'h-gouez :

n'int ket bet doñvaet, evel m'en diskouez o anv. Er c'hoadoù e vevont peurliesañ. Gwiz-ouez a vez graet eus o farez, ha perc'hell-gouez eus o re vihan.



E-pad 3 miz, 3 sizhun ha 3 deiz e vez ar parezed o tougen. Well-wazh e vez ganet 15 porc'hell bep taol.

Douaroniezh





Evit gwarantiñ orin ar boued er gourmarc'hadoù ez eus teskanvioù : gant al **LOG** hag an **AOG** eo testeniet orin douaroniel lod bouedoù.

Ar seurtoù morzhed-hoc'h LOG hag AOG brudetañ e Frañs

Morzhed-hoc'h sec'h

- LOG morzhed-hoc'h Vande
- LOG morzhed-hoc'h Arvern
- AOG morzhed-hoc'h Bigorra
- LOG morzhed-hoc'h Baiona



Gant al logo "Le Porc Français" ez eus gwarantet daou dra : a orin eus Frañs eo ar c'hig-moc'h hag ar charkuterezh (loened ganet, savet, lazhet ha treuzfurmec'h e Frañs), gant doareoù mat eo bet savet ar moc'h.

Ha gouzout a rez ?

Ar moc'h ne vezont ket atav roz. Da skouer, e Korsika pe e Gwaskogn, e Mervent Frañs, ez eus moc'h du. Lavaret a reer int a orin eus "Iberia", ha darbet eo bet d'o gouenn mont diwar wel un nebeud bloavezhioù zo.



Morzhed-hoc'h mokedet

- Morzhed-hoc'h mokedet Jura
- LOG morzhed-hoc'h Frank-Kontelezh

Morzhed-hoc'h sec'h

- AOG morzhed-hoc'h sec'h Korsika




Keginañ

Rekipe ar Penn Bihan : un alumenn gant morzhed-hoc'h

Evit fardañ da rekipe da-unan gant Jul ha Lena !

Evit 4 den ez po ezhomm :


- 4 vi
- 2 dellenn vorzhed-hoc'h
- Emmental rasklet
- Un tammig amann



Dav eo basañ ar vioù da gentañ, ha lakaat anezho goude en ur baelon domm lardet un tamm.

Lakaat poazhañ evel a garez, hag ouzhpennañ an emmental rasklet hag ar vorzhed-hoc'h troc'het e lavnennigoù.

Cheñch tu d'un hanter eus an alumenn, gant sikour un den bras, ha servijout tomm-mat.




Salud deoc'h, me zo Sebastian va anv !

30 vloaz on, saver moc'h on abaoe 5 bloaz e Milizag e Breizh. Abaoe m'on aet war ar vicher-se e labouran evit ma vefe ma moc'h ha ma gwizi en o aez.

Loened kizidik-bras int, ouzh an heol hag ar c'hleñvedoù dreist-holl. Ret eo ober war o zro bemdez, ha diwall o yec'hed.

Evit sevel moc'h eo dav en em aozañ ha prederiañ.














Rak-se e vez kempennet meur a gorn, diouzh ezhommoù al loened, dreist-holl evit ar gwizi o tougen a vez bodet er c'horn mammelezh, lec'h ma chomont 4 sizhunvezh gant o re vihan. Gant an holl gornioù-se e c'hall ma skipailh heuliañ a-dost hol loened bemdez, evit o mad. C'hoarielloù koad hon eus staliet ivez, evit dudiañ anezho. Hag evit ma vefe gwelloc'h o boued on krog da c'hounit edoù a-ratozh em ziegezh. Kement-se a reomp o soñjal en amzer-da-zont, evit ma vefe aesoc'h deomp bezañ emren.









An droienn

Pa vez un den war e du fall e vez lavaret :


Lakaat ul lizherenn e-lec'h an ikonenn a glot ganti evit kompren ar frazenn. Diskoulmoù pajenn 8

Livañ

gant Jul ha Lena




Gwir pe gaou ?

Gra ur groaz er c'harzennoù a zere ! *Diskoulmoù pajenn 8*

- 1 ▶ A bep seurt boued a vez debret gant ar moc'h
- 2 ▶ E penn ar moc'h emañ ar vorzhed-hoc'h
- 3 ▶ E-leizh a brotein zo er vorzhed-hoc'h
- 4 ▶ A-hed ar bloaz e c'haller debriñ morzhed-hoc'h
- 5 ▶ Ar moc'h-gouez zo moc'h ha n'int ket bet doñvaet
- 6 ▶ Glasvez hepken a vez debret gant ar moc'h
- 7 ▶ Gwiz a vez graet eus parez ar moc'h
- 8 ▶ Ur seurt morzhed-hoc'h zo hepken


GWIR GAOU





GOUZOUT PEP TRA GANT JUL HA LENA

Peseurt morzhed-hoc'h dibab e ti ar charkuter ?



RESPONTOÙ
 Pañenn 2 : Eus pelec'h e teu ar vorzhed-hoc'h : an darn a-us ar vorzhedig-hoc'h • Pañenn 6 : Gwir pe gaou : 1 = gwir ; 2 = gaou ; 3 = gwir ; 4 = gwir ; 5 = gwir ; 6 = gaou ; 7 = gaou ; 8 = gaou • Pañenn 5 : Tirienn : Emañ ar moc'h war an ed-du • Pañenn 7 : Gerioù-kroaz : Roz, morzhed-hoc'h, gwiz, pemoc'h-gouez, pastell, treid, porcheñ, bagetenn, keuz / Farsadenn : pemp • English exercise : liv roz = pink ; pemoc'h = pig ; mogedet = smoked ; morzhed-hoc'h = ham ; vi = egg ; keuz = cheese ; amann = butter ; penn = head ; skoaz = shoulder ; troad = foot